

KLOAREK KOAT-ANN-NOZ.

Buez ann den war ann douar
A zo karantez ha glac'har !!!.....

Dalc'h eta ma gwazig-dour, gant da hibout tener,
Da frealzi ma c'haloun, pa-z-ounn erru er gear;
Gra d'in dibri hep anken ar bara am euz bet
Digant ann den pinvidik savet war lein ar bed.

Gweach-all pa oa d'in eur vamm hag eunn tad da garet,
Me na wienn ket neuze petra oa boet klasket;
Eur gwele mad da gousket, paket em palennou,
Piou a oa ken evuruz nemet sent ann envou.

Goude eur pennadik skol e lavaraz ma zad :

- Me a gred d'in e rafe Iannik eur belek mad;
- Da Landreger ez aio da ober he studi
- P'am bezo great kement-ze gant joa vraz e varvinn.

Gwelloc'h e oa gan-en me choum er gear da c'hoari,
Da bignat war eur garrek, ha da c'heulia Mari,
Da zelled euz Menez-Bre ha chapel Sant-Herve,
Da zaspugni mouar-garz da ober gwin nevez.

Eunn deiz ma oamp hon unan o vesa hol loened;

Mari d'in a lavaraz : « Iannik, m'em euz klevet

- Da dad, da vamm o laret e kaso ar persoun
- Ac'hanod da Landreger, ranna raï ma c'haloun !.... »

E-pad ann noz na gouskiz, na reann nemet gwela;

Enn deiz warlerc'h pa zaviz, ma mamm d'in a dosta :

- Warc'hoz kenta, ma mabik, da Landreger ezi;
- Belek e renkez beza, ha mont a renkez di.

Chetu me o vont neuze euz eeun da Banfourbi;

Hag em euz kavet eno ma c'hoarik leaz Mari :

Pegen eüruz e oamp-ni, bugale daouzek vloaz,

Mari a daolaz war-n-ounn eur sell ann tenera !....

Dalc'h breman eta, Iannik, dalc'h ar vedalen man,

Ha ped war-n-hi ar Werc'hez, mar tigoue din choum klanv;

Laka ebarz da guerc'hen medalen Rumengol,
Houn-nez eo al lousaouen a ro iec'hed d'ann holl.

Ann deiz warlerc'h erruaz, hag e renkiz neuze
Kuitaat ma zad ha ma mamm, Koat-ann-Noz, Koat-ann-Ae,
Ha monet da Landreger da ziski ar gallek,
Al latin hag ar gregach, ankouaat ar brezounek !....

E-pad eiz vloaz ma choumiz er skol el Landreger,
E teuenn diou veach ar bloaz da welet ma zud ker ;
Mont a reann da Banfourbi evit gwelet Mari ;
He furnez a oa ker braz ! Doue a oa gant-hi.

Mont a rezomp eunn devez da welet Menez-Bre,
Da welet Menez Gwenn-C'hlan hag hini Sant-Herve ;
Hon tadou hag hor mammou a oa gan-e-omp ive ;
Peger buan ann amzer ebarz ar chapel ze !!!...

Me em zao war ar Menez a lavaraz neuze :
Gwenn-C'hlan, barz brudet e Breiz, peleac'h peleac'h oud-te ?
Eunn deiz bennak erruo, er bez me a ielo,
Peleac'h e ma da hini pevarzek kant vloaz zo ?

Dirak-oun eo bet savet, harpet war he delen,
Ha diouz-in en deuz komzet, komz a reaz evel-hen :
« N'en deuz den war ann douar ebarz ann devez man
» Hag a hellfe lavaret peleac'h ma bez Gwenn-C'hlan.

- » Gwir mad eo, ma relegou war dosen Menez-Bre
- » Em boa gweach-all douaret, ha me c'hoaz e buez ;
- » Hogen te ganet barzik eann deiz a vezo barz,
- » Ez pez sonj euz a Wenn-C'hlan, kuzet dindan eur c'harz. »

Ha pa oe great ma studi, e teuz c'hoaz d'ar gear
Dâ c'hortoz beza kaset prestik d'ar seminear ;
Laret e oa gant Doue na vijenn ket belek,
Pelloc'h evit na sonjenn er gear e oann choumet.

Ar vosen zo didruez, gouzout a rit ervad,
Lamet e deuz digan-en ha ma mamm ha ma zad,
Hag ann hini a garenn, ho ! peger braz glac'har !
Ma Doue, deuit da harpa ann den war an douar.

Neuze eo deuet em speret monet da Rumengol,
Ar Werc'hez a zo eno a ro iec'hed d'ann holl,
Me ia, gant ma medalen, da vro sant Gwenole,
Ha ma dourn d'ar pinvidik a astennim bemdez.

Erru dreist Menez-Arez, a bell em euz gwelet
Bro ann aotrou Graveran, gant kerneviz karet :
Peger kaer e oa Krozon, parrez ann den santel
A zo marvet e Kemper, n'en deuz ket c'hoaz gwell bell !

Dirag-oun Lann-Devennek em euz gwelet neuze,
Em zu kleiz ar Menez-C'hom, zo breur d'a Venez-Bre ;
Sonjal a reann e kær Is, e Daoulaz hag ar Faou,
Ha Rumengol a weliz war lez Koat-ar-C'hranou.

Goude peden ar salud, chetu me enn Hanvek,
Er barrez en deuz bevet gweach-all c'hoaz eur c'hloarek,
Gwelet em euz al lochik peleac'h e oe ganet ;
Evuruz ez eo hirio ; ra vo Doue meulet !

Chetu me erru breman ; ractal am euz klasket
Skeuden ar Werc'hez Vari gant he zae alaouret ;
Choumet ez oun enn noz-se gant mamm ar gwerc'hezed,
Breman ez ann da laret ann traou em euz gwelet ;

Da hanter-noz ann iliz oa ker sklear hag ann deiz,
Ar seiz sant a Vreiz-Izel a welann goude-ze ;
Chetu ar roue Grallon, sant Gwenole gant-han,
A bep tu d'ann *eskop gwenn*, ann aotrou Graveran.

Leun ez eo ar santual a zent, a zentezed,
A eneou evuruz ann iliz zo karget ;
Eneou ar purgator deuet a greiz ar flammou,
Evit pedi ar Werc'hez da gaout truez out-ho.

Sant Kaourintin enn he zao en deuz komzet neuze :
Ho ! peger kaer prezegen da domma ann ene !
Lavaret en deuz d'ez-ho pedi evit ar vro,
Ha Mari war Vreiz-Izel he bennoz a skulio.

Kerkent ez int distroet ouc'h ar Werc'hez Vari ;
War ho daoulin ann holl zent a zo eat da bedi ;
Da bedi hor mamm santel, ar Werc'hez vinniget,
Da zerc'hel bepret ar feiz e-touez ar Vretouned.

Ho feden peur-c'hreat gant-ho, ez eo savet ann holl,
Hag ann teir zro d'an aoter a reont gwel zeol ;
Neuze peb a c'houlouen gant-ho em euz gwelet,
Eur c'han eur ar baradoz em euz ive klevet.

Grallon a oa o tougen ar groaz er penn kenta,
War he lerc'h sent Breiz-Izel a glever o kana ;

Ann or-dal a oa digor, mont a rezont er meaz,
Choumet ez oun ma unan eno gant ar Werc'hez.

Me grede e oann erru enn env dirak Doue,
Pa glevann aun *Angelus* da zigeri ann deiz;
Neuze diwar ma daoulin me a zo prim savet,
D'ann aoter vraz a galoun ann teir zro em euz great.

Da dreid ar Werc'hez vari em euz ive poket :
Hogen ho ! pebez burzud ! diouz-in e deuz komzet :

• Iannik, servicher feal, pehini a garann,
• Roet zo d'in evit-oud eur c'hras euz ar gaëra.

• Jesus, ma mab, da Zalver, en deuz d'in lavaret
• E tremeni da vuez enn eur c'hoz-ti kouezet;
• N'az pezo evit gwele nemet eur bern deliou,
• Hag a dreuz toen da di e weli ann envou.

• Na vezo dor na prenest war ann ti az pezo,
• Ha da damm boet a glaski betek heur ar maro,
• Hag eur weach great kement-se, sell, kaëra kurunen
• Me ma unan e teuinn d'he lakaat war da benn. »

Ho peger mad eo Mari, chetu me frealzet;
Goude-ze d'ar relegou gant joa em euz poket,
Koulz ha da gorf sant Silven, digaset gant ar Pab;
Neuze diouc'h iliz Mari em euz renket pellaat.

Ha breman pa-z-ounn erru ebars e Koat-ann-Noz,
Da glask ma zammik bara kent mont d'ar baradoz,
E c'houlennann evit-oc'h ar c'hras, ma breudeur keaz,
Da veza holl selaouet pa bedot ar Werc'hez.

Ken.

Mil meuleudi d'ar Wreiziadiz
A zalc'h ho banier stard hag huel
Enep darn deuz ho c'henvroiz
A ra fae war gwerzou Breiz-Izel.

An drizek a Eost 1857.

KLOAREK KOAT-ANN-NOZ.

Moulet gant Ar Goffik, e Lanhuon.